

**Minores pemp bloas.**

Nem boa nemed pemp bloas pe a vad  
Pa varvas va mam a va zad.

ma voa red din mond da vale  
pa na kaven den am c'honduche

pa voan gant an hent e vonet  
Daou zen iaouank e meus rankontret.

me rankontr eun otrou ag eun itron  
Dre ma voan eur plac'hik a fesson.

A va c'hass gati d'he zi  
evel pa vijen merc'h dezi.

ne voan ket bed pel en he zi  
na voa konkluet va demezi

ma lavare ar mest ag ar vestres  
poënt eo dimisi ar vatez.

ma mestrez a voa devodez  
D'an itron varia eus a Karmez

ma c'hassas gati d'ar pardon  
dre ma voan eur plac'hik a fesson (1)

Dove a vouie va intention.

ne voamp ked entreet pel er c'hood  
ne voa skwizet va mestrez vad,

hag hi lakad he ven var ar barlen  
en avis ober eur volen. (un somme) (2)  
Dond eun dra da lavaret din  
kemer ta c'hontel a laz-hi  
tallek he c'halon peteck he fen

e roïs dezi seïz tol kontel.

hag e zelli en eur poul-glaou *[et je la jetai]*  
 hag e gollo gant an delliaou.  
 nemet he boutou hag he leraou.

ne voan ket deuet pel emez ar c'hood  
 ma meus me rankontret ma mestrik mad.

— Setu lazet va mestrez vad  
 Gant ar forbannet er c'hood.

Va mestr a kommans da voëlla

— tavid va mest na voellid ket  
 ma ho konduo evel pepret.

A n'hi mond dar garmes dar pardon  
 Doue a vouie va intention.

Ne voan ked bed pel en he-zî  
 Na voa konkluet on dimezi,  
 A kerkent on eureuji.

Ma teuas va vestrez vad en ti  
 Sei'z goulouen goir dirazi.

Da belec'h e zes-te vechantes vrás  
 te c'heus lazet an eb am magas  
 en devoa ta zilamet divar an ent bras.

Oll païsantet me o ped  
 Da chervich an noblans nan deot ket.  
 Me zo bed en chervich an noblans  
 hag a meus ar groug d'am rekompans.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) Vers ajouté dans l'intervalle entre le 1er vers et le vers barré.  
 (2) Cette indication appartient au ms. Penguern.